

Dek greunenn vihan

	Da lenn (<u>à lire</u>)	<i>E-barzh al levr (dans le livre)</i>
0	Dek greunenn vihan	<i>Dek greunenn vihan</i>
1	Dek greunenn vihan, ur verionenn i labourat.	<i>Dek greunenn vihan, ur verienenn o labourat.</i>
2	Nav greunenn vihan, ur lapous i pigosat.	<i>Nav greunenn vihan, ul labous o pigosat.</i>
3	Eih greunenn vihan, ur logodenn i toulleñ.	<i>Eizh greunenn vihan, ul logodenn o toullañ.</i>
4	Seih plantenn i tiwaneñ, ur velc'hwedenn i ruzeñ.	<i>Seizh plantenn o tiwanañ, ur velc'hwedenn o ruzañ.</i>
5	C'hwec'h plantenn vihan, ur c'hoz i tifoupeiñ.	<i>C'hwec'h plantenn vihan, ur c'hoz o tifoupañ.</i>
6	Pemp plantenn vihan, ur c'hazh i skrabeiñ.	<i>Pemp plantenn vihan, ur c'hazh o skrabañ.</i>
7	Peder flantenn dener, ur volotenn i freuzeñ.	<i>Peder flantenn dener, ur volotenn o freuzañ.</i>
8	Teir flantenn vras, ur c'hi bihan i freseiñ.	<i>Teir flantenn vras, ur c'hi bihan o vresañ.</i>
9	Div vroñsenn i kreskeñ, re a c'hwenn i tebreñ.	<i>Div vroñsenn o kreskiñ, re a c'hwenn o tebriñ.</i>
10	Ur vleunienn i tispakeñ, ur wenanenn i vleuniata...	<i>Ur vleunienn o tispakañ, ur wenanenn o vleuniata...</i>
11	Ha dek greunenn adarre !	<i>Ha dek greunenn adarre !</i>